

RANCONTR A JOA ENTRE DAOU DEN YAOUANG

EN NAONET

IIA SEPAR A C'HLAC'HAR EN KER LAVALETTE

Var eun ton nevez.

BRETONET a vas Vreiz-Izel, grit un arret d'am c'hlevet,
Ma tecl'rin dec'h eur guentel so en ho mesq composet
Eus a gomzou eur fumelen ha va re da enebi,
Comparachabl eus eur fleuren a zo anvet romani.

En eur vapeur o voyagi, me am boa hi rancontr
Ha dre vril e galant'ri e oan anter souprenet,
E velet eur music flamanec a zirai a zone,
Hac ar verdaily yaouanc var bond al lest a zance.

Dre ar stum vad a exile eb appel e c'houlennis
Pe seurt alianç a c'heuille ha petra e benefiç,
Ha ma oa prest din respontet: eur vates a gonfiç,
Er vro-ze neve arriet evit servich an noblanç.

Dre he demarch en polites, gand un douçder qer charmant,
Da suiva e c'hompagnunes em boa eun desir ardent:
Mæs va depeign en comparis d'e guenet pa gomprenen,
Nemat eur sqeut a yaouanquis ne oa quen en e c'hichen.

E qer an Naonet e gonelis goude-ze o sortial,
Pa oa finisset an ofiç, eus an ilis cathedral:
Va dorn er pincin a laqis, da guemer dour benniguet,
Hac ebete e avancis, ma devoa ma saludet.

En gallee, neuse gand doujanç, deñ men a lavaras:
C'hui rapport dre humiliant e vere'h trouen breis yzelas;
Car reglennou ar fierte so er vro man conduet,
Mæs reglen an humilite a so neubet implijet.

Ma respont, ep distrei eu dro, brillant, douç ha quer tener:
Ya, me sorti eus va bro, divar rout ker Landreguer,
Hac ar pez am laqua jenet e ma meus ampechamant
Er principou a so fixet dre ar vro man da barlant.

Em brezonec neuse souden et teuis da annoci:
Me reget dre antretien, plac'h yaouanc, o condui:
Ma sorti a rout Landreguer merq o teneredignes,
Me a zorti a rout Finister, a draouen qer Montroules.

Den yaouanc, emei, certain, en desir ho fantazi,
Heuliomp renq an estranjourien gand furnes ha modesti,
Ma c'hallin en eur gonsolin en assamblich hor c'homzou,
A chassal an angoui a ra va jenamanchou.

Fumelen, me zo ep cessi evel hirvoud eur sermon,
Delou va speret et voelc'hi plac'ar gonsolacion;
Mæs nebeut e vin consolet, car dont a ran da gredi
C'hui vo bourreo d'am joausdet, goude va accompagni.

Den yaouanc, va exempl vigner mar be ferm ho santimant,
A vo eur breuven a sclerder eus hon amitie fervant
Da bini e vezin fidel bete an de eus va fin,
Ha ma renqan en dilezel, e vo poesant ma chagrin.

Neuse da assina un de eus on amzer da zonet,
Ma refomp dre sincerite merq un unioa barfet,
Demp da choas ar guir garante en jardin ar fleurdilis,
Evit govern on amitie ar rest eus hor yaouanquis.

Ya, emei, er garcen eus ar fleurdilis caera
Demp da choas peb a gurunen, a yesq ar re brillanta,
Pere a blæssimp en armel a drezor ar yaouanquis,
Ha dre on unioa fidel, ni o dougo d'an ilis.

Dre ven ar signal a squeudid e mellezour ar furnes
Hac an deziñ a annocit, mar be solid, ma mestres,
Goude an devez assinet, a dra facil e credan
Ne separo mui hor speret tied hon deyou er bed-man.

Hac encal, va servijer, reglen hor promesseou,
Mar bec'h evelon e fermder, ne deo qet a arretou,
Mæs gret intancion erfad, en de-se a breparet:
Ne vere'h un enemi ingrat d'ar merquon a brometet.

Salcroas gand va bolante! Mæs finissomp da barlant,
Hac arretomp var quement-ze, car fin an de a gommand.
Adieu a lavaran eta, en esper d'en em velet
An de-se e c'haparissa er plac' hon eus assinet.

Mæs de an assinacion, ar goas a oa bet manquet
Hac ar plac'h a impinion neuse arrias doetet,
Dre ma crede facilamant e oa dei godisser;
Car fragilou e santimant e deoa contet re scler.

Un de goude, var ho daoulin e oaint en em mermet
E couent Santes-Catherin, dirag anter an Drindet,
E lec'h mo deoa soutenet or bounera tomderou,
Incomprenabl da bep speret a dud ar bed da gomprou.

An den yaouanc, pa remerqas victim e zociete,
Var e vemoar et tisqennas flamineu an amitie;
Mæs ebete en em avans e oa geinet en guirion;
Men a deuyo da reparin va oll fautou passeet.

Ar c'hurunennou fleurdilis, emei, ma servijer,
Eus a armel hor yaouanquis a zo collet or sclerder;
Mæs mar cavit ar sclerder-ze en deoa d'o assambli,
Nin o fleurisso a neve ha doubla o yeoni.

Hor c'hurunennou, va mestres, ne allan qet da gavet,
Car ne varchem qet assambles er poent ma oaint dianquet,
Ha mar bec'h din godisseres, me vo hirvoudus rentet;
C'hui e oa o gouverneres ha dec'h e oaint adresset.

Dec'h jiveza, va zervijer, e oa hed din lavaret
Evit passeal an amser e teuit d'am darempret:
Dre ze, pa e d'am bolante heuil urzou ar virione,
Ne avancis mui va bete, evit heuil faus amitie.

Va mestres, james ne gredit e ve en guirion plasset
An dragidien ipocrit a goms an teod milliguet;
Mæs heuillomp ar bromesseou a gondemp qeu leal,
Ha lezit oll droug oberou ar goel deodou infernal.

Retardit o stendi monden, ma sclerien va speret,
Car e lec'h ma coc ar veen a ve ive divranquet,
Ha gand un ach a draizou c'hui deu da zisgrianni
Ar bod ros a opinion pini oa eus on henchi.

Mari-François, a dra onirion, ha c'hui a alle credi
E teufem da c'heuil traizon a bemp leo d'ho frecanti?
Regetti ran punition a beurs Doue, gand justic,
Ma conufen un urs poeltron eneb or gouir yaouanquis.

Ya, den yaouanc, eb difer, red e vijec'h eur poeltron:
Heuil a rec'h poent eur godisser, de hon assinacion,
Car ma vije bet fermamant ho prepojou angajet,
James ide ho santimant c'hui n'ho pije trabisset.

Gant eun nom bras a dourmanchou en hon assinacion,
Ma ne barissen a gomzou e parissen a galon,
Er precursor, c'hui al credi, so cazi evel eun treujou,
Pini, qement a ya en ty e man indan ho boutou.

Ya, eus ar brecursoret e ser dor al liberte:
Credi a ran ar barfetri, da c'hoas merq on amitie,
Dre ze eta renouvelomb on reglennou commancet,
Ha goude e c'hanavefomp hac int a vo faus verqet.

Mar deomp da renouveli or joausdet a neve
Antreid en eur ofrebiri, da c'hoas merq on amitie,
Pini, mar bec'h cri a garo d'en traissa dre gomzou,
Eus o torn men a receo da boguardi va joayou.

Mar recevit da respontanç eur vest en olifant guen
A douguenni va alianç composet en aour melen,
Merq hon amitie men choaso gand eun nombr bras eus a joa,
Hac a zoufre quen ar maro evit dont d'en traissa.

An daou den yaouanq-man a gred, dre eur sort sincerite,
E anfermet, assur, er bed, ar rancontr eus o ide;
Mas he o deus da souteni pouer an teir fleuren mechant
Pere a so anvet sourei, ha melcosi, ha tourmant.

Va mestres, din zo amaret eur hec'h pouver ha forban,
Ar murmur e ma partifet vit ar guer a Orlean.
Penos resista d'an anquen, en de-se a angoui,
E tout da freza ar chaden a zo eus hor e'hondui.

Allas ! emei, va c'hras mechant e deus bepret ma c'heuillet :
Bremen, pa oan joassamant queit eus va bro ecartet,
Goeled e teufe e rigueur d'am plassi en eur feson,
Ha da ma plonji er maleur bete griou va c'halon.

Salut ha glac'har, va mestres, en porchet Sant-Semilien ;
Ari an urz hac ar finves pini a rai va troublien ;
Car ne vo get cos on doare c'hui vo chanchet ho comiou,
Hac o po collet an sle'hoec e drezor hor memoariou.

Salcroas ne golin biqen merq hon amitie' dener,
Avançomp bete ar blenen, ma passeemp hon amzer
Da arouzi gant hon daelou ar boqueden fleur bian
Eus a jardin o prepojou, en ambazan Kerzerdon.

Er plac-man eta, va mestres, finissomp hon oll gomzou,
Car ne varehomp mui assambles ed ar rest on devezou :
Dre ze qiniadomp a galon, ya, evit birviqen,
Adieu er bredication dirac ar mestr souveren.

Va serviger, qen discleria ha donet da gontempli
Litaniou Santes Anna ha re ar Vere'hes Vari.

Adieu a galon anterret qen avo app'issa
Da c'hortos ma vezimp barnet en izelen Josapha.

Neuse, er mes iat sortiet a jardin o amitie,
Ebars er guer a Lavalette, var bord ar c'hanal neve :
Ego e cessi ar c'hiniat hac en ferm antretien,
An daelou eus o daoulagad a boullade eu ho c'hichen.

Va mestres, breman men droyo, ya, vel eun den mantret,
Eh arreti bete va bro, da obteni joansdet ;
Prosternet a rin en Montroulez, gand eur merq a vodesti,
Dirag retablen ar Vere'hes, en ilis Sant-Malani.

Hac en leal, va serviger, er memes intancion,
E caren e ve amzer ma ven ari em c'hanton,
Pa avanci c'hoas, gand adres, va mcues a humilite,
Dirag imach Santes Agnes, en ilis Berleouene.

Tud yaouanc, ne assamblit get qen form ha nin ho chaden ;
Eur guir amitie separet a eo mortel da zouten ;
Car evit ne ve get scritef var ar bisac'h, dre gomzou,
Ar galon a ve glac'haret ha beued en daelou.

Ar zon-man, en guirione, francq a voa un de copiet
Gant un amenuzer yaouanc, ebars en qer a Naonet ;
Anvet e *Olier Mercer*, dre scritur en peb sin,
Hac ar plac'h yaouanc a anver *Mari-François Volantin*.

An daou den yaouanc-man, na cessont ar c'himiad eus o c'homzou
A esper c'hoas, en eur respont, a speret, dre lizerou,
Ha ma na ellont assambli var ar bed-man ho bue,
O deus sonch d'en em saludi en gloar an eternite. AMEN.

ELOJOU AR PATATES

Mar gallan gout ar feçon, e mije composit
Eur chanson da eloji an trevat biniguet,
Pehini a doug an hano demeus a batates,
Recour a ra an dud en ker ha voar ar mes.

Gant he ve lardet ar moc'h, ar saout hac ar c'hezec,
Ha d'an dud daou bred bemdez, eur bansion reglet.
Inaouet en em gaver en deiou malarje,
En defot a batates da noz ha da greiz-de,

Tachomp d'en em gonsoli, pa vezo tremenet,
E c'hario ar c'hoaraz hac e vezont peillet,
Diou vech bemdez en plaçou ha teir en plaçou all ;
Pasq a deuo d'e gouls evel an ordinal.

An amser a blijadur, ar chanchamant souben :
Eun tam quic sal a vo gant eur batatezen.
Digas 'reont nerz ha courach d'ar paour quez labourer
Da labourat an douar, ma vezont bras ha caer.

Explicomp ar c'haliteou demeus ar patates :
Lemel a reont ar famin a gôf meur a baour quez,
Evit ar re binvidic e lardont ho loenet,
Ha sicour paea fermiou, goude ma ven guerzet.

Na oufen quet rei deze a gaëroc'h elojou,
P'e gouir eo o laçan mestr an trevat er vro ;
Guejal e voa ar guiniz estimet ar muan,
Ha breman ar patates a c'hone varnezan.

Quent ma ve mad ar guiniz a renquer e grazan :
Pe vo glao pa avel pa vet ous ho zennan,

E haller o farci ha dont d'ho sauvetat ;
An ed pa ve glebiet 'ra quet a vara mad.

Pa denner ar patates, ve gret ane tri bern :
Ar re vras evit guerza, da dibri ar re greu,
Ar re vian a ve da rei an aluzon,
Hac ar rest a ve lacquet evit larda 'r c'hochon.

Bretagn a zo recouret gant ar boet biniguet :
An nep a laca dindan-he douar eur boellared,
An eus tri-uguent poellat hac ouspen alies ;
Trugarecaomp Doue ha hadomp patates.

Ar bayzantet gant lez a loncq e tom scod,
Pez a pez en ho c'horso ar re a ve commod ;
Ha tud chentil ar c'hériou o frepar delicat,
Poazet ebars er forn assambles gant quic mad.

Explicomp quent finissan d'an oll en guirione,
Ar pez so bet arriet, c'hoarvezet ho goude :
Tenn-brom 'ra al labourer 'n eur antren er parcou,
Quen a lamp ar loened er mez dreist ar c'hleuziou.

Trugarecaomp Doue hac e Vam biniguet,
Ha goulennomp digante hon lod er joasted ;
Canomp a voez huel honor d'ar patates,
Ho lequomp var an daol aroc ar plat crampoez.

An hini a neus rimet ar recit a neve
A desir e prosperont ebars en he gontre :
Olier ar Bolch he hano, hac a deui d'he c'hana
El lec'h ma vo cals a dud, mar gallo e guerza.